

- 133 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

49. AR KLOAREK

( follennoù 158 - 160 )

Pa voan em c'hamp o studia o skriva  
Gant va pluen arc'hant.

Voa digasset din eul liser.  
Da vont incontinant dar ger.

Da vont dar ger evel ma karin  
Mar goëlchen beo an eb a karien,

A me disken gant ar vinss d'an traon  
evid monnet treuzek va bro.

A paka ma leuriou tri a tri  
evid monnet en treuzek henri.

° ° °

Pa voan gant an hent e vonnet  
Ar c'har a meus bet rankontret.

A me rankontr ar c'har ag an ten° ° ( = an denn)  
Ar veleïen guisket e gwen  
e kass va douç da San Jermen.

I a ie dre an hent en eur kana  
Me a ie dre ar park en eur voëla.

Na pa erruis en illis  
Sikour kana n'offic a ris.

Pa voa question da pea n'gle  
e faïlle d'he va fea ive.

Mirit ho harc'hant da pedi doue  
Choas a vezò istrik it-i° ° ( = estregeti? )

Na pa duis emes an illis  
Var bez va douç e daoulinis

A me goulen doc'h va doue  
Ma ne goëlchen eur vech c'hoas en buhe,

Pa voan erru e mez ar verret  
eur fumelen gaer a meus rankontret.

eur fumelen gwisket e gwen  
hag i goulen ouzin evel-hen :

- E pelec'h e teuet na ma zet  
A mo c'heus esper da vonet.

- Dioc'h offern va euret e teuan  
Dar ger breman monet a ran.

- Mar duït deus offern ho c'heuret  
Roït dime lod deus ar banket!

- Ma no pez lod deus ar banket  
O pezo lod deus eur galon klac'haret.

- Tavit, tavit, na voëlit ket  
Rag me e zeo o tous Jannet.

A zo lamet divar ar bed  
evid ma vicher c'houi belek,

Ma vijen me bevet a ma vis  
Ne vicher ket bed den a illis,

Nemet o tud o kondaonche  
a mar grachen c'hui kuitache

Adieu kennavo a lavaran  
Kenavo e traonien Josephan.

Traonien Josepha var ben an dro  
Gant grass Doue n'hi nem vello.

A me paka va leuriou tri a tri  
Distrei adare dam studi.

vvvvvvvv

Jannet Puill, klasqeres a henvik 13 Gwenver 1851

vvvvvvvvvvvvvv